

CHANSON NEVEZ

Voar sujet ar c'hebest roet gant presanchou pardon ar C'halvar

Voar ton : Mari-Louis.

Poent ann neve amzer, saison rejouissant,
Ha rann ann dour, ha can eunvet a richant,
Mintin o fredoni, choaset deus oll ho far,
Evit cuzan ho neiz en torrante pe er bar.

Nimp zo daou botr iaouanq oa rejouisset,
Gant ann nevez amzer ha mouez al lapousset ;
M'ar tro red ar fortun, vel m'emb intansion,
M'imp choazo peb a bar deiz zul ar Basion.

En bourg Pleudaniel, deiz pardon ar C'halvar,
Zujet hon joüstet zo chenchet en glac'har,
Deus e guebest nevez digaset deus gret provision

Tud iaouanq ar Presquil en em rent en deiz-ze
En bourg Pleudaniel, d'ar c'henta assemble,
Evit n'em saludi, goelet ho mignonet
Ha choas peb a bar 'ben ann anv da zonet.

Tre 'r bourg hag ar C'halvar ve ar iaouanquiso
Rum ha rum ho vale, goude ar gouspero ;
Eno mimp remerquet, en bort ann assemble
Ann diou fleuren iaouanq direzemp comz gante.

O tremen dre o c'hever : Poent eo bale, merc'het ;
Respont agreabl : Breman refomp goerset ;
Ractal a commansont assambles da vale,
Veloë hon esperanc o kreski a neve.

Goude eun distro ber homp en em rancontret,
Mouet d'ho zaludin gant henor a respet,
Ha zevel hon togo, vit merq humilite,
Goulen antren humblamant 'bars n'ho societe.

Dre eur pas empresset he filont ac'hane,
Eus n'em respont fier : na refomp quet fete ;
Cetu peb a gabest d'Imari a Guillaume,
Vit bezan fresq ann amzer, ar zouben-man zo tom.

Guillaume.

N'ellomp quet n'em damal, neus quet lec'h fachiri,
Hon daou e mamp dezir da vont d'ho zaludi ;

Breman, hep preferanc, pa verve ar zouben,
Zo trempet dimp hon daou deus toul an danserien.

Imari

D'emp d'ann hostaleri d'evan peb a vannac'h
Vit trempant non hebest en plas regali eur plac'h ;
Eon ber nimp a velo piou zo occasion
Carolin ha Paulin n'eus assination.

Guillaume.

Na gomp der a Paulin bars ma societe,
Breman Paulin a gousquo n'em gaele ;
Entre ma m'o memear deuz zul a Basion
Klevet comz a Baulin a sponto ma c'halon.

Imari.

Red vo dimp ma mignon, chench cren a derrouer
Merc'hed iaonang a Breskil zo er blan-man fier ;
Me moa esperans d'ober vol gant caro
Ha chetu me beten ha brouillet ar c'harto.

Avans ra ann amzer, ari ann abarde,
Bepred, ma merc'hed oc'h unan o vale
Me gred hint digasset d'ar pardon a bresant,
Quen trist eo ho bisaj vel n'eun interramant.

Me garje vit arc'hant clevet eur guir secret,
Piou eo ann daou den mad o deus bet digasset
Daou bresant d'ar C'halvar deiz Zul ar Basion,
C'hoas zo tud charitabl en mesq ar bobl breton.

Barz eiz devez goude, dijons a meus clevet
Piou zo occasion ma c'hom bet cabestet ;
Carolin ha Paulin diou blac'h intilgeant
Anavezet a deuz pell gant cals ha tud iaouanq.

Lun ar lard, en Poutrer, o vale oar ar ru
Grede gand ar merc'hed, doa gret malarge dru ;
O rancontr daou den iaouanq deus canton Roc'h-Derrien
A dennas cos gant-he p'ho gueljont o tremen.

Ar merc'hed a oa pront d'en em debarassi,
Occhpas ar botred gant peb a baraplui,
Mont reont o fevar assamblez da vale,
Ha d'evan peb a vannac'h roc fin ann assamble.

Ann daou farser iaouanq a zante ar boesson,
A gomze d'ar m'erc'hed en dezir ho c'halon :
Deus ar briadelez ha n'em etablisson,
Antren en jouissans d'a vouel Mikel quantan.

Paulin gonz deuz François, deus he avantaj gret.
Te teus feurmet eur plas, choazet danve da vreq :
Fin zo da guement-se, zavet zo fachiri,
Mar bec'h contant, Paulin, donet d'he ramplasi.

Ivon, deus ann tu all a gonte da Garo,
Quement a plesantin, cals a avantajo ;
Goulen nezi evit pried, na dezire quet guel,
Cetu quelo fricou pa vo arru guel Mikel.

Bed o deus plijadur o fevar assambles,
Pazeo arru' un abarde, zo tam tristidiguez,
Ar merc'hed desire bezan conduet d'ar guer
Ar botred c'ha dre n'end-all, oa dese muioc'h ber.

Oar poend ann disparti, gred assination
En bourg Pleudaniel deiz zul ar Bassion.
Amitie divoar boesson zo vel bario en an
Col a ra ar vizion pa deu a'eol da baran.

Deut eo an doou den man da vale d'ar pardon
Deus quet accomplisset ho destination ;
En diou blac'h iaouank all a man ho esperans,
Mes mar o deve refus pezo n'eil prererans.

C'houi o peus gret, me gred, evel ar plac'h figus
Nep deue de goulen a oa zur o refus,
Evit gortos re-all gueloc'h d'he zantimaod,
Peb den ra e avantaj he varras cos plac'h iaouank.

Quentel merc'hed iaouanq divoar ann nistear-man,
Pa vefet en plas foar ha c'hoant dec'h da voerzant

Intantet guelloc'h raison ha roet herve ar c'hour
Rac hep ho marc'hadourez a raio peb maç'hadour.

Cour ar foar a dremenno pa sonjfet neubeutan
Vez ret dec'h rabatin pe mired da gozan ;
Nep pezo mepriset a gavo merc'hed all
C'houi a iel partout a brezant, mar na guerret dioual,

Laret peuz a oa feiz gand dreg ho cotillon
Goelet ar sort degre deiz zul ar Bassion ;
Nimb zo quen couls a c'houi a gorf hag en moyen
Ha mar gueo feiz guenac'h lequet en o quichen.

Hon c'hentan dismegans d'hon bro ha d'hon ligne
A zo c'hoas da ober me gred a ouzoc'h-se ;
Ra-se pijs quet collet ho reputation
En hon compagnunez deiz zul ar Bassion.

Goud a red, Carolin, ann amzer dremenet
Coulz vel ho c'hear François hon deuz bet baleet
En meur a assemble, bed cals agreamant
Ebars en honestis en qualite tud iaouanq.

N'eur glem voar hon profit ze na dal quet a boan
Ha clasq escuzo ven, paquet clos eo an tann ;
Bed hom beuz peb a gabest, libr da glasq merc'hed-all.
Gras m'ho devo gueloc'h chaas goude hon rancontr fall.

Ha c'hui chareterien deus canton Lézardreo
Mar neuz ezom quebest corded mad canap creio
Profitel evel domp pa guever marc'had mad
Gant merc'hed Pleudaniel ez eo frank ar c'hanap.

Poent eo der finissant, aru eo hir ma chanson,
Bremen v-ze casset d'imprimer Lanhuon
Ha p'aruo canerien, 'an assembleo Preskil
Vezo canet zon' re'hebest, ha guerzet ouспен mil.

(Propriété)

